

NIVERENN 21 2<sup>e</sup> BAJENN ~~III~~  
2vet bloavezh Bep Gwener

Mererezh, Skridaozerezh:  
2 straed ar Richardiere  
35100 ROAZHON

# AN AMZER

## DIBENN AN ENKLASK E PLOGO

«YA EVIT AR GREIZENN»

eme enklaskerien EDF  
goude an enklask

D'ar Meurzh 15 o deus resevet ar c'helaouennoù disorc'hoù enklaskerien EDF, a-du gant savidigezh ar greizenn.

Met ar gazetennerien n'int ket deuet a-benn da dizhout anezho peogwir o deus kemeret ehanoù. Ar poellgor difenn, 20 kevredigezh ennañ, a c'houlenn e vefe tennet o c'harg digant an Ao Prefed (Penn-ar-Bed), hag ur c'homiser polis e Kemper.

### nac'hañ youl an dud

"A-du eo Kuzul Enklaskerien EDF e Plogo evit sevel ar greizenn". Setu disoc'hoù an enklask, berrmet kement sklaer! Evel ma ne oa bet tremenet darvoud ebet a-hed ar c'hwec'h sizhunvezh a enklask.

Biskoazh marteze n'eo aet ur gouarnamant eus ar pempvet republik e Bro C'hall ken pell a-enep d'an dud war dachenn o buhez pemdeziek. Ar c'hwervder n'eus ket bet o klevout ar c'hel-mañ, amzivin ebet a oa evit ar pezh a sell ouzh disoc'hoù an enklaskerien.

Muioc'h eget c'hwervder. Sklaer eo n'eo ket ul lod hepken eus poblañs ar C'hab' a zo a-enep da sevel ar greizenn. Al lod brasañ eo. Diskouezet o deus annezidi kanton Plogo ne fell ket dezho gwelout ur seurt atomva ahont. Ha neuze, ne c'hell ket lavarout an enklaskerien emañ a-du ar boblañs. Neuze e lavaront, evit pouezañ war o diviz, o deus Kuzul Departamant Penn-ar-Bed ha Kuzul ar Rannvro mouezhiet evit sevel ar greizenn.

Da betra en deus servijet an enklask? N'eus forzh piv ez eus un tamm spered gantañ a soñj diouzhtu ez eo bet aozet an enklask evit ober van da

zivizout en un doare demokratel. Farsus a-walc'h! Pep tra a oa aozet en a-raok. Hogen ne c'hortoze ket ar mererezh-bro ur seurt stourm a-enep d'o raktres. Nag a zarvoudoù e-pad c'hwec'h sizhunvezh! Bep abar-daez, da 5eur, an "Oferenn", bardelloù savet bep noz, pro-sezioù Kemper, manifestadeg dirak palez justis Kemper...

Dre rediañ eo e vo savet ar greizenn, ha pa soñjer en deus an Ao Giscard d'Estaing lavar-et a-raok bezañ dilennet da brezidant ar Republik gall ne vefe ket savet kreizennoù nukleel a-enep d'an dud a zo o chom war dachenn ar raktresoù, n'eo ket c'hwervder hepken a zo ennomp, un amzivin bras e-keñver lealded ar re a ra war-dro hor aferioù boutin(sañset) ne lavarant ket.

M. SEURIALL .


## War al Liger. BIGI BETEK ORLEANS?

Naoned.- Ur stêrveur gaer eo stêr Liger. Met tud 'zo a blijfe dezho ivez e teufe ar stêrveur da vezañ un hent-stêr pa ouezer n'eus ket kalz a zarempredoù kenwerzh etre Naoned ha Kornog Frañs, keinvro ar porzh breizek anezhañ.

Setu perak ez eus bet krouet ur gevredigezh, "Liger" hec'h anv, enni pennoù bras Naoned ha re ar c'hêrioù all lec'hiet er Val-de-Loire. Pal ar gevredigezh-se eo lakaat ar bigi da zont betek Tours ha zoken marteze betek Orleans.

Gouzout a reer ne c'hell ar bigi mont nemet betek Bouchemaine e-tal Angers, ha c'hoazh pa vez uhel a-walc'h live an dour, da lavarout eo e-pad ar mizioù du ha da vare an nevez-amzer. Neuze, ret e vefe da gentañ, kregiñ gant al labourioù war al lodenn Naoned/Angers, ha terkadurioù eleizh a vefe d'ober. Evel ma weler, ne vo ket echu an traoù a-raok pell. Hogen, ma vefe gwellaet ha pa ne ve ken an darempredoù etre Naoned hag Angers, se a vefe un dra vat endeo evit dazont ar porzh breizhat.

P.K.



GRAVELINES 1979.- E Plogo, peseurt aon resis?

## BUHEZ SEVENADUREL

### ROAZHON

Ti an dachenn-Veurzh, 29 Ebrel: Diviz diwarbenn ar butun, gant ar CRIDEV.

### FELGER

Sal ar Befrez, 25 Ebrel: Rak-tres Alter Breizh.

### GWITREG

Kêr, 30 Ebrel: abadenn folk, gant "Militantouille".

### DINAN

C'hoariva an Totem, 25 Ebrel: A Toute Berzingue, l'Azur.

### SANT-MALO

Kêr, 27 Ebrel: G. Besson el Liberty.

### JUGON AL LENNOU

Keroueze, 2 Mae: Rollmops (abadenn rok).

### SANT-BRIEG

C'hoariva, 29 Ebrel: Amzer Vak (Quartier Libre), Prevert.

### MONTRouLEZ

Mirdi ar Jakobined, betek an 2 a viz Mezheven: taolennoù C. Bryen.

### KAWAN

Sal ar Maerdi, 25 Ebrel: abadenn-wel a-zivout al Larzag.

### LOUERGAD

Bo urc'h, 30 Ebrel: Fest-Noz, evit Diwan.

### LANDREGER

Ti-kêr, adalek an 29 a viz Mezheven betek ar 14 a viz Gouere: diskouezadeg diwarbenn ar mor. Titouroù digant an It Pilliez, 11 straed Colvestre, 22220 Landreger, PG:92.30.46.

### LECHIAGAD

D'an 30 a viz Ebrel: abadenn melldroad Kemper/Bro Vigouden, evit Diwan.

### BANALEG

30 Ebrel: Fest-noz evit Diwan.

### KERPERZ

Bourc'h, 2 Mae: Coucou Mamman (abadenn rok).

### LANDIVISIO

Ti Loezig, 1 Mae: C. Besson.

## KELEIER BREIZH

An Alre.- Krouet eo bet nevez 'zo Kevredigezh Kenetre Moraerien ar Mor-Bihan, 1.400 familh enni, a zo he fal bezañ pont etre kenetrevezh (mutualité) ar Mor-Bihan hag an dud a vor. Gant sindikad C.F.D.T. ar vartoloded eo bet roet lañs dezhi.

Roazhon.- Graet ez eus bet un ensklask gant an INSEE (Ensavadur Gall Feurjedoniezh ha Studioù Armerzhel) a-zivout stad al labour e Breizh. Hervez an Ao Tregouret, a oa e penn an ensklask, eo aesoc'h kaout labour en ur ober stajoù e-barzh an embregerezhioù.

Naoned.- Gouel bras er Pirc'hirin d'ar 4 a viz Mae, aozet gant K.L.K.N. ar rannvro da enebañ ouzh raktres an atomva.

Sant-Nazer.- Dalc'het eo bet d'ar Sul 20 a viz Ebrel 26vet kendalc'h strollad Breizh mignoned an timbroù.

### estrenvro

Londrez.- En o c'hendalc'h bloaz e Blackpool o deus votet izili an National Union of Students ur mennad o c'houlenn e vefe roet d'ar merc'hed a zo toullbac'het en Armagh (Norz- iwerzhon) ur statud politikel. (19.04.1980).

Londrez.- 1,5 milion a lurioù saoz a roio gouarnamant Breizh-Veur evit skoazellañ ar c'hembraeg e-pad ar bloavezh 1980/1981. E 1977/78 (gouarnamant sokialour) e oa bet roet 2,72 milion a lurioù saoz (=27,2 milion a lurioù gall).

8,35 milion a lurioù saoz a vo roet d'ar Scottish Arts Council, a zo bodet ennañ aozadurioù evel ar Scottish Opera (1,88), ar Scottish Ballet, ar Scottish National Orchestra, ar Scottish Philharmonic Society, ...

Ur studiadenn a zo bet graet gant an Ao James eus an INSEE, e Brest, diwarbenn armerzh Breizh.

Setu un nebeut traoù en deus merzet:

-Etre 1970 ha 1977 en deus niver an dud o labourat el labouradegoù kresket (23%).

-Gwan e chom stad al labouradegoù.

-N'eus ket kalz a embreger- ezhioù oc'h ober war-dro ijinerezh ar boued o tont eus al labourdouar (agroalimentaire).

-Chom a ra renerezhioù an embregerezhioù e Pariz.

● 11 soudard a zo bet kontammet e Tregastell gant ur varikennad poezon bet kavet war an aod.

● Mestr ar vag chaluter "Mab an Teg", bet harzet gant ar Saozon, a zo bet lezet da vont, met tailhoù gastiz en deus paeet: an eil a 50 lur hag egile a 200 lur.

● Adprosez an Ao Choucq e Roazhon d'ar Merc'her 16 a viz Ebrel. Disorc'hoù d'ar 14 a viz Mae.

● D'ar Meurzh 22, ez eus bet lakaet, gant n'ouzer ket piv, ur vombezenn da darzhañ er C.I.O. (Kreizenn Gelaouiñ war ar Micherioù) e kreiz-kêr Brest.

● Kenderc'hel a ra en diskrog labour dastumerien loustonioù ar gêr e Kemper.

● An Ao Kardinal Gouyon, arc'h- eskob Roazhon, en deus komzet diwarbenn ar gwaskerezh en Amerika ar C'hreisteiz ha stourm an Iliz evit ar beorien, e-barzh kelaouenn an eskopti. Dalc'hit soñj eus drouklazh an Aotrou Romero.

● Diskrog labour er skolioù. D'ar Yaou 24 ez eo o deus sindikadoù kelennerien galvet o izili da baouez da labourat. Hiziv eo ar strollad Cornec a galv e izili da zerc'hel ar vugale.

### D'HOL LENNERIEN

Hon digarezit evit ar cheñchamantoù

Rener ar gelaouenn: Mark DECAMBOURG

600skouerenn moulet - C PPP 62319